


Sell ouzh ar bed en un doare disheñvel

# Louarnia

BLOAVEZH MAT  
2014!

Kazetennviziek Nnn 136-5 € - Genver 2014



En niverenn-man :

P. 3  
**SAOZNEG :**  
**BRANDON**  
AR FOETER-BRO



P. 3-9  
**ISTOR**  
**NEVEZ**  
**PAOTR**  
**LOUARN**

P. 13  
**Naggeneen**



En niverenn o tont



**Louarnig**

Mensuel - N°136  
du 1<sup>er</sup> Janvier 2014  
5€ an niverenn / 5€ le numéro  
60€ ar bloaz / 60€ l'année  
Niv. CPPAP : 0514680670

Embannet gant / édité par :  
KEIT VIMP BEV 29520 LAZ

Rener an Embann /  
Dir de Publication :  
Yann-Fañch Jacq, yf.kvb@orange.fr

Kenurzhierz ha maketenn  
Coordinatrice et maquettiste :  
Camille Argouarc'h,  
camille.kvb@orange.fr

Moulet gant / imprimé par :  
SOFAG, BP21 - 29590 AR FAOU

Skeudennoù e zo implijet gant  
Aotre-Implijout Creative Common  
Dereñ/Kennannañ

Certaines images utilisées sont  
sous licence libre Creative Com-  
mons ou <http://www.photo-libre.fr>

(<http://www.creativecommons.org>)

creative commons

Embannet gant skour  
Avec le soutien de



# KENAVO, « MADIBA »


Marvet eo Nelson Mandela d'ar 5 a viz Kerzu 2013, d'an oad a 95 vloaz. Fromet eo an dud er bed a-bezh rak un den a zo bet o stourm kreñv a-enep d'ar **ouennelouriezh** a-hed e vuhez eo bet. Lesanvet e oa Madiba, abalamour eo anv e veuriad hag hervez an hengoun vez anvet e-mod-se en dud "a-enor".



Deuet eo Nelson da vezañ **alvokad** ha stourmet en deus en ur strollad politikel hag a veze berzet gant ar gouarnamant. E 1941, gant tud all eus e strollad e tibabjont distruj un nebeud staliadennoù foran pe reoù all, stag ouzh an arme. Hepdale e voe Mandela harzhet ha kondanet d'ober labourioù betek fin e vuhez. Tremena ra **27 bloavezh** eus e vuhez **en toull-bac'h** ! Dont a ra da vezañ un den brudet-kenañ er bed a-bezh abalamour d'e youl da stourm evit an **ingalded** etre an dud du hag ar re wenn. Dieubet eo bet e 1991, a-benn-ar-fin. Resevet en deus priz Nobel ar **peoc'h** e 1993.

# KELEIER AR BED

En e vro, Afrika ar Su, e oa bet lakaet e plas un **Apartheid** gant an dud wenn, renet ar galloud ganto : da lâret eo n'o doa ket an dud du kement a wirioù hag an dud wenn, ha difennet e oa dezho en em veskañ. Da skouer e veze rediet an dud du da vevañ er-maez eus ar c'herioù bras, da vevañ e kêria-dennoù gouestlet dezho. Bodet e vezent en un doare ma vez graet "**ghetto**" anezhañ bremañ.




E 1994 eo bet dilennet da brezidant Afrika ar Su. Ar **prezidant** du kentañ e Afrika ar Su e oa. Staliañ a reas an demokratelezh ha derc'hel a reas da stourm a-enep d'an ingalded, d'ar SIDA hag evit gwirioù n'ab-Den. N'eo ket alies e vez gwelet tud pouezus bezañ anavezet er bed a-bezh abalamour da vezañ **graet ar vad**.

# PELEC'H EMAN BRANDON

Bro-Roumania

## KARTENN ETREVROADEL

### 'Foeter bro a vicher'



- Anv : **BRANDON WILLIAMS**
- Ganet e : **Bloomington, rannvro Indiana, Stadoù-Unanet**
- Micher : **foeter bro**
- Dudi : **senñ mandolin ha darbuka, mont da bourmen en natur**
- Mod da vevañ : **o tiwall ouzh an endro**



All over the world, people are rediscovering how to live sustainably and ecologically friendly. Er bed a-bezh emañ an dud o vont en-dro war-zu ur mod da vevañ hag a ziwall ouzh an endro.

Here, in a small village in Transylvania, helpers at a community called "Acasă la Gugu" build a home out of cob. Amañ en ur gêriadenn vihan e Transylvania, emañ tud a-youl-vat eus ar gevredigezh « Acasa la Gugu » o sevel un ti gant Ardilh.

Cob is a mix of clay, sand, and straw. Ardilh zo ur meskaj graet a-ziwar kleiz, traezh ha plouz.


It is a very ancient building practice that many still use all over the world, Ur mod kozh-noe da sevel mogerioù eo, kalz a dud a implij ar mod-se d'ober er bed a-bezh

while others find it as a healthy alternative to modern architecture. ha lod all a gav dezho eo un doare yac'h da chom hep ober gant an doareoù modern da sevel tiez.

It is even a common, traditional practice in Brittany, where many old cob buildings are still E Breizh eo un doare hengounel ha boutin zoken, rak chom a ra kalzig a diez, o mogerioù graet gant ardilh, chomet

standing after hundreds of years. en o sav daoust d'ar c'hantvedoù.


Șuncuiș,  
România



**SALUD DIT !**  
ANAVEZOUT A REZ **PAOTR LOUARN**  
LENNET GANIT BEP MIZ E **LOUARNIG**.

EMBANNET VO AN ISTOR  
A GROG WAR AR BAJENN  
DA-HEUL E-BARZH UN ALBOM E  
BREZHONEG HAG E GALLEG  
DINDAN AN ANV **FOX-BOY**.

**TRUGAREZ DIT\* !**



\*A-DRUGAREZ DIT  
EO DEUET PAOTR-  
LOUARN DA VEZAÑ  
BRUDET E BREIZH  
A-BEZH, HAG HEP  
DALE E VO E  
BRO-C'HALL !

LAVET  
LEFEUVRE

**Troioù-kaer birvidik, suspens...**

SETU AOZENNOÙ ABADENN NEVEZ BUHEZ POL SALSEDO  
ALIAS PAOTR-LOUARN. AMAÑ E LOUARNIG E C'HELLI LENN  
AN ISTOR-MAÑ A-RAOK AN HOLL !

LAVAR DA SONJ DEOMP DIWAR-BENN AN ISTOR-NEVEZ-MAÑ !  
EMBANNET VO DA C'HERIG E LOUARNIG.


**camille.kvb@orange.fr**

ARABAT DIT DISOÑJAL : **LOUARNIG**, DA GELAOUENN AN HINI EO !

**SKIPAILH LOUARNIG**

ROAZHON. 11<sup>vet</sup> KÊR VRASAÑ BRO-C'HALL HA KÊRBENN BREIZH.

200 000 ANNEZAD, EN O ZOUEZ UR C'HARD MAT A STUDIEREN. KERKENT HAG AR YAOU DA NOZ E VEZ KROGET AN DIBENN-SIZHUN E STRAED SANT-MIKAEL, LESANVET "STRAED AR SEC'HED".



D'AN EUR MA VEZ KLOZET AN TAVARNIOÙ, EO TENN SPERED AN DUD HA N'EO KET RAL EN EM LAKAFE LOD D'EN EM GANNAÑ.

FENOZ EZ EUS UR LABOUS NEVEZ WAR EVEZH EN E GLUD, PREST DA GREGIÑ E-BARZH.

HARZH  
D'AL  
LAER!

"BENN  
AR FIN!"

Brezhoneg gant  
Camille Argouarc'h  
ha Yann-Fañch Jacq

The angel of the lake whispered in my ear.  
'Before you chose your wish son  
You'd better think first  
With every wish there comes a curse.'

Bruce Springsteen  
'With Every Wish'

"Lavarot en deus sel al lenn dir,  
en ur chuchumuchuil em divskouarn  
a-raok ma tibabfen dia c'houlenn  
ma mab, mat 'vaf'a dit en em soñjal,  
rak gant pep goullenn e teu mallozhioù"

EMañ AVEL YEN MIZ KERZU O FOETAÑ E ZREMM.  
NE RA NETRA DEZHAR ABALAMOUR D'AN ADRENALIN  
E VEZ DISONJET AN TRIVIVADOÙ ALL.

POL EO E ANW. 16 VLOAZ EO.

GOUDE BEZAÑ TREMEKET TEIR NOZVEZH O  
C'HOITDZ EN ANER EZ EUS TRES BIRVIDIK  
WAR AN NOZ-MAN O TONT.



Laeroñsi un  
hezoug a-zifrap.



Kalz gwelloc'h  
eged un emgann  
etre lonkarier.

D'an nebeutañ  
ez eus unan  
drouk hag  
unan jentil.

Ne vo ket a "HARQZ  
pe GOURDROUZ  
e Ouest-France  
em c'hervet  
warc'hoazh virtuel.



Tec'hout a  
ra war-zu  
ar ganol...

KROC'h!



MA DS!



GENAQUEG!



Chom sioul.



Paouez  
da sorjal-

-ha laosk  
da zont.



Setu.

Sell 'ta.  
C'hwez h kreñv  
gantañ.  
Berr e alar.  
Unan hag a vitun.

K'levout a ran un  
dra bounner en e  
chakod. Ruzañ a ra  
war darvez e vragoù,  
da bep pazerin.

Ur geger\* ?

Diwall, Polo.  
Ur DS zo moaien  
kavout unan all.  
Ur penn toulllet  
avat.

-Ul livenn-gein  
kennebeut.



AAAAA

Ro  
an hez...  
AOUCH

Batman  
ma revr !



Ro an  
hezoug  
en-dro.

G@t !  
Skarzh  
kuit !

... N'OC'H KET  
MAT!

O. chabous.







CIRCUIT

SUPER-HEROS  
**Fox-Mar**  
NE MATHIN  
**BD**

Da Verziñ kerzalc'hot.

# Divin 'ta...

**Peseurt loen en deus an niver brasañ a zent ?**



Hep sellet zoken, gouest on da gavout ma hent ken mat diouzh an deiz ha diouzh an noz. **Piv on ?**

**En dour on ganet hag en dour e varvin. Piv on ?**



Tri ponsq !  
Resbont :

# Luziet...

En em gavout a ra daou houad dirak un houad, ha daou houad a-dreñv d'un houad. Un houad a zo e kreiz.  
**Pet houad a zo ?**

**C'hoarzhin !**

- Mat vefe dit goulenn gant Baba.
- Perak ?
- Evit kaout ali Baba !

Kinniget gant Fañch Oger

:D XD ^^

penaos e vez lâret...  
e Yezh ar sinoù ?

## "DREIST"



**SERR DA ZAOUARN HA SAV DA VIZIED-MEUD.**

## SUDOKU

4		3	1		
	4	5			3
2			4	6	
		4	5		2

Disoc'hoù en niverenn gentañ



# Naggeneen

SENARIO & TRESADENNOÙ : CHRISTOPHE BABONNEAU

BREZHONEG : C. ARDUAËRCH HA Y.F. JAOZ



N'OUT KET BET GWELET  
O LABOURAT C'HOAZH HA  
SETU PRES ZO DIJA  
WAR AN DAOU-SE TAÑVA  
DA WHISKY\*.




NE BLIJ KET HOR  
BOURBON WHISKY\*  
D'AN DUD TAMM EBET.  
PADAL HOR BUTUN A ZO  
UNAN DEUS AR C'HENTAÑ.  
N'EO KET G WALL VAT EVIT  
YEC'HED AN DUD.

A YA ?



SETU  
AN TOULLIG  
LEC'H BIRVIDIKAN  
AR GREAT HOLE.



PETRA 'TO DA EVAÑ ?

FEIZ, EMAON O  
VONT DA DAÑVA  
UR BANNE  
BOURBON !



E, FRAOGH ! UR  
PINTAD HAG UR  
BANNE «STAOT-  
RAZHED» MAR  
PLIJ !

DIOUZHTU,  
RUDDY



HA SETU !



SLÁINTE  
MHAITH\* !

FÁILTE GO DTI  
BEAGDOLL\* !

SLÁINTE  
MHAITH\* !

\*Graet 'vez « whisky » eus hini Europa ha « whiskey » eus hini Amerika

\*Yec'hed mat, degemer mat er Great Hole e Iwerzhoneg



# Hec'h unan-penn e-bourzh he

# BAG

Sandrine, mezegez-loened Louarnig, a ginnig **Juliette** deomp, ur vignonez dezhi. Mezegez-loened eo hi ivez ha sot eo gant ar bageal. Ar bloaz-mañ he deus divizet lakaat hec'h anv evit kemer perzh e redadeg

divent ar bigi, **Hent ar rom** Treuziñ ar Meurvor Atlantel a-unan war ur vag eo pal ar redadeg-se ! O klask sikour un embregerezh emañ Juliette evit ma vo arc'hantaet ur vag dezhi. En eskemm e vefe brudet merk an embregerezh war ar vag. « Sponsor » a vez graet deus se. E-mod-se e vez graet gant moraerien ar redadegoù bras evit gellout kemer perzh.



Evit sachañ evezh un embregerezh e tiskouez an dud o skoazell da Juliette war al lec'hienn Facebook® o embann poltridi outo asambles gant o loen. War he blog e c'hellez kaout keloù eus he zroioù-kaer <http://juliettesurlaroutedurhum.blogspot.fr/>

ΧΑΟΥΚΟΥΝΟΥ Ρία με  
το σκοαζελ da JULIETTE  
evit  
Hent ar Rhum 2014

# Afersadenn gant Juliette

Eus pelec'h out ?

Eus Tours on, e-kreiz Bro-C'hall. Betek an oad a 18 vloaz on chomet eno da vevañ, betek ma 'z afen da skol ar vezeien-loened, e Naoned. Labouret em eus evel mezegez-loened da-c'houde, e Bro-Vande, en Aveyron hag e Breizh.

Pell 'teus kroget da vageal ?

Diwezhat a-walc'h em eus kroget da vageal. Evit se on disheñvel ouzh ar voraerien vrudet !

Da 25 bloaz eo bet piket ma c'halon gant ar mor ha gant ar bageal abalamour d'ur staj 'm boa bet graet. Adalek ar mare-se em eus divizet ne vefen morse o vevañ pell eus ar mor ken.

Deuet on d'en em staliañ e Breizh. Tremenet em eus un diplom bageal hag adalek neuze on bet o vageal an aliesañ posupl, o kemer perzh e redadegoù etre bigi.

« tal-ouzh-tal  
ouzh an  
natur »

« enaos eo deuet ar sonj dit hermer perzh e ?  
Hent ar rom ? »

Un hunvre e oa. Met ur c'hoant ivez da welet betek pelec'h e oan gouest da vont rak diaes eo en em gavout hec'h-unan, tal-ouzh-tal gant an natur, e-pad ur prantad ken hir.

Un doare all da lakaat e spered hag e gorf da c'houzañv eo, e-unan war ar mor. Tec'hout kuit, en ur mod.

« E-seurt doare bag a blif dit ar muiant ? »

An unkouc'hoù a zo gwelloc'h din. N'eus nemet ur c'houc'h dezho, n'int ket evel ar c'hatamaranoù, peder c'houc'h dezho, pe an trimaranoù, dezho teir c'houc'h. Plijout a ra din ivez ar bigi-redadeg. Gant ar re-se e c'heller mont buan-kenañ ! Santimantoù dreist em eus pa 'z an a-benn herr war ar mor.

Bezañ mezegez-loened ha moraerez :  
peseurt perzhioù boutin zo ?

Bezañ  
er-maez, e-mesk an natur,  
gallout sellet ouzh al loened... Ober  
ul labour start evit ar c'horf ivez : sikour  
ur vuoc'h da halañ zo ken start ha sevel ar  
gouelioù ! Dav eo derc'hel ur spered sklaer  
ivez p'en em gav an diaezamantoù : dirak  
ul loen en arvar pe pa vezer o vageal  
e-kreiz ar gwallamzer.

Petra eo ar plijusañ, an heol  
o serel pe o vont da guzh ?

Plijusoc'h  
e kavan ar sav-heol, ken brav gant e  
livioù. Pa vez an heol o vont da guzh e talvez ez  
eus un nozvezh hir o tostaat. Nec'hus eo.

Aon du 'teus bet rak  
ar gwallamzer dija ?

Ya, aon du em eus  
bet rak barroù avel kreñv spontus. Pa vez ret  
mont da zastum pe da astenn gouelioù, e penn araok ar vag,  
dreist-holl. Pep tra a hej a bep tu. C'hwezhiñ a ran an avel er  
gouelioù hag ar santimant 'teus da vezañ taolet dreist al lizenn. Pa  
c'hoarvez traoù e mod-se e ranker soñjal  
en a-raok er mod e vo dav bleniañ ha chom stag-mat  
ouzh ar vourzh.

Bet out pell  
o vageal  
da-unan dija ?

« Pa vezez da  
unan penn  
o vageal e rankez  
bezañ war evezh  
dalc'hmat »

Bageal ma-  
unan am eus graet  
ha plijet bras on bet, ya.  
Ret eo bezañ war evezh  
dalc'hmat.

Mont pell eus an aodoù hag  
e-pad pell n'em eus ket graet  
morse c'hoazh, avat. Un dra  
nevez e vo evidon !  
Treuzet em eus ar Meurvor  
Atlantel dija, asambles gant  
ur skipailh moraerien. Bet  
on e Bro-Saoz, e Inizi  
Açores, e Bro-Spagn  
ivez.



# Kejet 'tous gant delfined a-wechoù ?

Ya, alies e kejan gant delfined !  
N'eus ket ezhomm mont re bell  
evit se, zoken. War aodoù Konk-  
Kerne em eus bet gwelet eus outo.



## Ha gant loened all ?



Gwelet em eus bet ur c'hwezher bras <sup>1</sup> ha delfined du <sup>2</sup> ivez. E-kreiz ar Meur vor Atlantel e veze pesked-nij <sup>3</sup> oc'h ambroug ac'hanomp ingal. Digredus ! Ha gwelet hon eus ivez balumed <sup>4</sup> o tifoupañ e-maez an dour hag o splujañ en-dro war o c'hostez oc'h ober ur **splach** bras !

## Ar vag unkouc'h

Ar lien bras

Herdin ar wern

Bomm

Ar barrennoù-stur

Ar sturioù

Ar wern



Ar lien  
a-ziaraog

Ar spinnaker

An adwern

Ar c'houc'h

Kein ar vag



\*Unan hag a ra goap/c'hoari a ra un dro gant ar re all